

CANTIK SANT ANTON

(TON NEVEZ.)

Diskan :

Kanomp oll, kristenien devot, kanomp a greiz kalon,
Eur c'hantik evit enori ha meuli Sant Anton ;
Hag en he vuez kaër guelomp eur meillour a furnez
Evit n'em ziouall d'oc'h Satan ha mont d'ar zantelez.

1

Er ger a Goma, en Ejipt, oa ganet ar zant-ma,
Dèz, enebour ar gristenien, oa neuze o rena ;
He gerent, tud pinvidik braz, tud a zoujanz Doue,
Abred mad a reaz dezhan anaout hent an Ee.

2

N'en doa c'hoaz nemed ugent vloaz pa oa deut ar maro
Da skoei he vam, he dad karet ! na disparti c'houero !
Na chom mui ganthan er bed-ma nemed eur c'hoar vihan ;
E ti merc'hed fur he laka . . . Hen, petra rei breman ?

3

Anton, eun devez, en iliz a glevaz lavaret
Ar c'homzou-ma euz a Jezuz en Aviel skrivet :
« *Mar fell d'id beza den parfet, gonid tenzor an Ee,*
« *Guers-da beadra, d'eus d'am heul, d'ar paour ro da zamve.* »⁽¹⁾

4

Raktal, evel sklerijennet, en eur zistroi d'ar ger,
He spered na c'hell dizonjal a gomzou hor Zalver ;
Ha fidel da vouez he Zoue, e c'huers he oll vadou,
Gant joa ho rann oll d'ar beorien evit ho ezomou.

5

En eun ermitaj en em denn : eno choaj evit skuer
Eun den oajet, leun a skiant, a furnez, a zousder.
Ken buan 'kerz an den iaouank e hent ar vertuziou
Ma ro heb dale d'he vreudeur ar c'haëra exemplou.

(1) MATH. XIX-21.

Mez allaz ! Spered an Ifern, adversour ar C'hristen,
 Gant kounar a ro d'he vertuz eur brezel hir ha tenn.
 He vilim kenta 'vit hor Zant eo lakat 'n'he galon
 Na gavo en he ermitaj nemed daonation.

7

Dre hep seurt ardou teu goude da dempti he furnez,
 E feurm eur plac'h divez zoken dezhan en em ziskuez.
 Mez Anton, ferm evel ar roc'h, a lavar da Satan :
 « Doue eo va mestr, va skoazel, tec'h, d'ouzid na rin van. »

8

Hen bed, iun, gousk var ar c'haled, ra bep seurt pinijen,
 Ha ne d'eo ket 'vit kemense echuet he anken.
 'Vit guelet he basianted Doue a bermettaz
 D'an Drouk-Spered hen trubuilla dre boaniou goassoc'h c'hoaz.

9

'N'eur c'hao gret didan an douar eo deut da n'em guzet ;
 Eno marteze a gav deoc'h e vo e peoc'h lezet.
 Nan ! An diaoul, evel drouk enn-han, en he fallagriez,
 A vrev he gorr dre an toliou . . . Ma gozik hep buez !

10

Petra bennag m'eo ken gloazet hag hen hanter-varo,
 A Zant a zell varzu Doue, 'vel David lar ato :
 « Hag a velfen-me en dro din eun arme a ziaoulou
 « Biken na greno va c'halon dirak ho oll ardou. » (1)

11

Dirak eun hevelep burzud, Satan, evel spontet,
 'Vit tourmanti goassoc'h ar Zant a c'halv he gonsortet :
 Ha dira-z-han e teujont oll, henvel ouz loened goez,
 D'he skoei, d'he ruilla e peb mod, da noazout d'he vuez.

12

En eun enkreuz ken estlamuz, meur a hini, a dra zur,
 Ho deufe bet kollet kalon, 'vitho da veza pur ;
 Mez Anton c'hoaz leun a fizianz en em lak da bedi
 Ha kerkent eo 'vel diboaniet, 'teu he nerz da greski.

13

Ma en he bemp bloaz ha tregont, tremen ra ar ster Nil
 Evit dont en eur c'hoz kastel leun a serpentet vil.

(1) Ps. xxvi-3.

Eno c'hoaz epad ugent vloaz a ro he zemeuranz,
Bep c'huec'h miz epken eur mignon zigas d'han he vevanz.

14

He vertuz er vro zo brudet, an oll a vandennou
A zired evit he velet, da c'houl he guzuliou.
O velet-ze Anton anav, daoust d'he humilite,
E renk kuitat, mont da lec'h al, galvet aberz Doue.

15

O va breudeur, pebez burzud, penaoz doc'h diskleria
An niver euz ar re zo deut hep dale d'he heulia ?
'Vit guir, an dezerz-ze kentoc'h a loened-vil karget,
Zo breman eun douar zantel, eur vro a ermitet.

16

Anton bemdez zeu d'o guelet gant joa ha karantez,
Ho c'helenn var ho deveriou, var ar guir zantelez.
Mez ar c'henta vertuz ganthan dezho gourc'hemennet
Eo ato lakat e peb tra ar brassa evesdet.

17

Beva er bed-ma 'vel eun El n'eo ket aoualc'h 'vithan,
Skuilla he c'hoad 'vit Jezuz-Christ ive a fell dezhan.
Hogen, er bloaz tri-c'hant unnek, Maximin Impaler
D'ar gristenien eur brezel kri a gommansaz ober.

18

Raktal 'teu da Alexandri, hag eno joa Anton
Eo rei kalon d'ar verzerien, o heuill en ho frizon.
Rebec'h ra zoken d'an tirant he oll fallagriez ;
Mes kaër an deuz klask ar maro, espern rer he vuez.

19

Pa z'eo echuet ar goall-gass e tistro d'he zezerez,
En em lak da iun, da bedi gant muioc'h c'hoaz a nerz.
He vuez a zo ken santel, ma teu Doue brema
Da rei dezhan galloud d'ober ar miraklou kaëra.

20

Bep seurt drouk, bep seurt klenvejou zo ganthan pareet,
Mez he c'halloud ispisial zo var an Drouk-Speret.
O velet burzudou ken stank, en he humilite,
N'em zifi outhan he-unan, e klask eur plas neve.

21

Dônoc'h en dezerz en em guz : Mez hep dale eo c'hoaz
Galvet da zont d'Alexandri a berz Sant Athanaz.

ar mare-ze, enebourien, hanvet Arianed,
Oa d'ar gristenien oc'h ober eur brezel diremed.

22

Na kaëra tra ! E berr amzer kalz euz an dud fal-ze
A zeu dre gomz nerzuz ar zant da zistroi oc'h Doue.
Test euz kement a vuzudou ar bobl oll estlamet
Hen suppli da chom en ho zouez. . . ar Zant n'ho silaou ket.

23

Ar manac'h zo evel ar pesk emezhan d'ar gouarnour,
Dezhan e ma red he zezerz evel d'ar pesk an dour.
Dont ra eta d'he ermitaj : gant he hent o vonet
E rent pare eur plac'h yaouanc gant an diaoul tourmantet.

24

Piou a c'helfe ive laret an oll c'hloar ha resped
Rentet dezhan gant tud pinvik, rouanez ha prinsed ?
Guelet a vijent ho-unan dre gomzou, dre skridou,
O c'houl ganthan bep kuzul vad koulz hag he bedennou.

25

Elfin en he bemp bloaz ha kant, dishenvel ouzomp-ni
E vel ar maro o tostat hep aoñn na melkoni.
E ma breman er Baradoz e kreiz al levenez
O veuli Doue deiz ha noz gant ar Zent, an Elez.

26

Evel Sant Anton, er bed-ma, mar fell d'eomp but parfet
Ra zistagimp hor c'halonou euz ann oll draoù crouet ;
Ra vezimp fidel d'ar beden e peb occasion,
Hag evel d'han ni a vo trec'h da bep tentation.

27

En eur c'harter euz a c'Huiscriff an devez Sant Anton
En he enor eur chapel gaër, plas a zevotion,
Kalz darempret bep bloaz, dreist-oll, d'ar seitek a Genver,
Devez ha ma rentaz ar Zant he ene d'he Grouer.

IMPRIMATUR :

Corisopiti, die 6 Decembris 1880.

DU MARHALLACH,

Vic. gen.